

# LABOUR

STAGADENN LABOUR

NIVERENN 3

PENN SKRIVAGNER

ALAN TORAVEL

Supplément en breton n°3. Rédacteur en Chef Alan TORAVEL .

## TAOLENN

---:---:---:---:---:---:---:---

Pennad stur :

Ar Brezhoneg hag ar Violons

gant Erwan EVENOU

Dilennadegou Breizh Veur

E Pelec'h emañ an Dud ?

gant Yann VREIZH

An istor gozh ha nevez

gant DOURIG

Ur sell war Dreger Vihan

gant Alan TORAVEL

DEIZ LEVR A PER DENEZ

---:---:---:---:---:---:---:---

Pennad stur

## AR BREZHONEG HAG

## AR VIOLONS

gant Erwan EVENOU

Ur brezhoneger yacuank a Vre-Dreger a lavare din un deiz : "N'en ket a-enep kelennadurezh ar brezhoneg, gant ma ve desket er-maez eus an eurioù skol ret, d'ar re a blije dezhe, evel ma vez desket c'hoari violons. En tu-hent da se ne welan talvoudegozh ebet d'ar pezh a c'houlennet". Ministr an deskadurezh e-unan, a-ziadrenv d'e daol-skrivan divent, n'en dije ket gallet komz gwelloc'h.

Hogen ni ne fell ket deomp gwelout hor yezh bountet war-dreñv betek renk ar violons. Ar brezhoneg evidomp n'eo ket un danvez c'hwek graet hepken evit dudi un nebeut arzourien e blev hir ; lavar ur bobl a-bezh, hag a vennomp adsovel ne laveran ket. Adsovel anezhañ ? N'omp ket mui arzourien douget d'o fenn neuze, met stourmerien en em ro d'o c'hefridi. Hag ar brezhoneg n'eo ket mui un arzig bourrus hogen her yezh vroadel, hag a ziframmimp

en-dro diouzh krabanou he mougerien peogwir e nac'homp gwerzhañ hor mammvro.

Hor yezh vroadel ! Euzhusat ! Disrannour ! Breiz Atao ! An holl dud a-zoare a skrij o treiñ gant heug ... Erfin, aotrou ! C'Hwi 'oar mat ez eus ur vroad unvan ha disrannus eus Bro-C'Hall ! N'en em laoskit ket da vont dreist ponn abalamour d' ho tammig karantez evit folklor ho proig !

En hon emsav avat ez eus tud fur : Hastet o deus buan o skubañ an enverennoù hegasus-se a oa chomet war-lerc'h un nebeut pennoù-brell, an emrenouriezh "n'eus mui den evit krediñ enni", ar vroadelouriezh, "tra peor-keizh a oa bet douget da daerifiñ gant darvoudoù c'hwerv", ha kement "follentez" eus ar seurt-se. Ha setu i o kerzhout laouen davet burev an aotrou ministr da lavarout dezhañ ez int Gallaoued eus ar gwellañ hag o defe kalz a blijadur ma vefe lezet ul lec'h bihan er skolioù da yezh kozh Vreizh-Izel. Kelennadurezh Vro-C'Hall a zo an hini uhelañ hag an hini ledanañ a vez er bed a-bezh : moervat e vo kavet ur plas enni evit ar brezhoneg evel ma 'z eus bet kavet evit ar gwrierezh, neketa ?

Ac'hanta ! a vo eilgeriet din, ur spered treuz a zo ganeoc'h ! Klask a rit pemp troad d'ar maout ! Ret eo mont gant furnez hag ampartiz, setu holl : ar pozh a reomp n'eo ken.

Gwashat tra, o deus ar C'Hallaoued graet o menez cheñch republik, hag ar gouarnamant nevez en deus lavaret e oa fall ar vachelouriezh hag edo o vont d'ober un tammig kempenn dezhi. Erfin ! Abaoe ken pell ma veze klemmet a-enep d'ar stlabez arnodenn-se ! Sed aze tud a raio un dra bennak a vat da vihanañ ! A ! Evel-just, an holl gemmadennoù o deus o zu gin ! Reoù 'zo a vo drouklaouen ! Met petra 'fell deoc'h, n'heller ket ober plijadur war-un-dro d'ar c'hazh ha d'al logodenn !

Setu : Lammet kuit eo bet brezhoneg diouzh ar vachelouriezh. O ! Na c'hoariit ket ho penn fall e-mod-se ! N'eo ket sirius ! N'eo ket un nebeut kentelioùigoù violcñs pe me 'car-me a dle mirout ouzh an aotrou ministr da gas da benn e dammig dispac'h ken spletus ! Ma ! Na ouelit ket, Bretaned : pleustret e vo war ho kudenn ! Met ... Petra 'rit, petra rit ' ta ?

Ar Vreizhiz yaouank a-greiz-holl a zo en em savet e-giz koleoù feuls. Dibunañ a reont a-viliadoù dre straedoù kêrioù Breizh o youc'hal. Ac'hanta ! Trelatet int avat ! Setu i bremañ o c'harmañ eo bet disme-gañset o bro ! A ! Nann, evelate, re bell ez it ganti ar wech-mañ !

Disrannourien ! Breiz Atao ! ...

Erwan EVENOU

D I L E N N A D E G O U  
B R E I Z H V E U R .

Anavezet mat eo disoc'h an dilennadegou diwezhañ evit ar c'hostezioù pennañ e Breizh Veur, ha trec'h ar virourien war al labourerien, deut da strizh gant done digezh un "outsider" al libereled. N'eo ket bet bruder kalz avat er c'helaouennoù gall disoc'h bihanniveroù Breizh Vreur ha kostezioù ar Broadoù Bihan, da lavarout eo ar Sinn Féin en Iwerzhon an Hanternoz, ar Plaid Cymru e Bro Gembre hag an Scot Nationalist e Bro Skos.

Anavezet eo deus ar Sinn Féin ur giladenn eus ar gentañ en Ulster,

zoken en ur c'hrefvlec'h eus ar c'hostez evel kern bro ar Fermanagh. Skoazeller gant an Iliz katolik e 1955, eo bet dilezet ganti en abeg d'ar gwall-daolioù dinive sevenet gant ar vroadelourien en Iwerzhonat abaoe un amzer'zo. Trec'hour bras ar c'hrogad eo bet kostez an unanourien o deus dastumet mouezhioù a veur dre holl.

E bro Gembre eo c'hoawezet ar c'hontrol. Ar wech gentañ e oa d'ar Plaid Cymru lakaat kement a zanvez - kannaded war raok. Dacugementet eñ deus o niver, war un dro gant niver ar mouezhioù roet d'ar Plaid Cymru. Test da 3000 mouezh a voe roet deshañ e Cerdidd da skoreer (Cardiff)

E Bro Skos, e voe diskouezhet ivez danvez kannaded ha war greskin eo aet ar fizians roet gant skosiz d'ar vroadelourien. Eveljust, neb anezho ne voe kreint a walc'h evit bezañ dilennet da vont er Parlamant. Sed amañ sifroù.

Bro Skos

Kannaded e 5 kêr (3 nevez)

e 1959	21.638	e 1955
		12.112
	<hr/>	
	+ 9.526	

da skoulo  
Perthshire

3568	e	1959
0	e	1955

Bro Gembre

19 ker (10 nevez)	75.574	43.885
	<hr/>	
	+ 31.689	

Swansea

+ 4651	1959
0	1955

Ulster

6 ker	47.522	126.670
	<hr/>	
koll	- 79.148	

Belfast

koll	-11.606	(e 59. 6.210)
------	---------	---------------

Fermanagh

koll	-23.181	(e 59. 7.348)
------	---------	---------------

Petra'r foeltr a ra ar re gozh ? Ar re gozh ne reont netra ! Garv-murbet eo ar rebech. Ha c'hwi, eme unan yaouank, petra a rit e Pariz ? Ho plas a zo e Breizh.

Da gentañ, ne gredan ket e chom "ar re gozh" oc'h ober netra. N'eo ket stank ar re zo aet skuizh o c'hortoz un emrenerez gortozet keitall, pe oc'h ober ar marv bihan bremañ en ur lavarout d'en emzigareziñ : Graet hon eus awalc'h evelse, d'ar re yaouank mont war an dachenn bremañ.

Eveljust eo bet techet ar re yaouank dalc'hmat da grediñ e oant ar re gentañ, re gentañ ar "jeu" evel ma lavare Taldir. Reizh eo. Ar "re gozh" a zo bet o soñjal kement all, ret ha ma'z eo evit reiñ lusk ha gwad nevez d'un amsav. Ar re gozh o deus skiant prenet, met fur awalc'h int evit gouzout, ma talv o skover da atizañ ar re yaouank, ar re mañ a hend-all, n'hellont kaout o mad nemet eus ar skiant prenet gounezet ganto o-unan.

Kredet o deus ar re gozh e oa an dieubidigezh evit Breizh oc'h en em gaout prestik ... a benn pemp bloaz, ha goude dek vloaz ha ... pelloc'h c'hoazh. Kredet o deus ar re gozh, ha ha kredet start, e oa dieubidigezh ar vro d'en em gaout war-lerc'h ur brezel pe un dispac'h bras. Deuet oe ar brezel, har an "heure bretonne" ne voe ket an hini vat. Ar re gozh koul-skoude o doa graet an holl drouz a c'hellent ober, e touez kenvroiz morgousket pe, gwashoc'h c'hoazh, aet da C'hallaoued penn da benn stummet ma oant bet diouzh se gant skolioù gall a lez. Breizh o bro gwir er-maez eus pep tra. Ar re gozh o deus graet traoù a-bep seurt : enskrivadurioù war ar mogerioù gant liv, peget o deus paprennoù, ingalet traktoù. Moarvat e c'hell bezañ lakaet war o choug, a-vlokañ, disfoeltradur savadur Roazhon, ur vombezennig amañ hag ahont, trouz bras er c'helaouennoù, a vrudas dievezh ar mestaolioù-se. Stourmet o deus dreist-holl o tuiñ paper hag o peurzeskiñ ar brezhoneg o yezh. Galvet int bet meur a wech d'an ti polis, harzet ha zoken barnet. Frorchet eo bet o ziez gwelet o deus o enebourien o tont da sammañ keut o levrioù brezhonek hag o niverennoù "Gwalarn". Kastizet int bet er skolioù - gwir kreizennoù "bugale fall" a oa el liseoù e Brest, Sant Brieg, Naoned ha me 'oar ( ar pezh n'eus ket, moarvat, en deiz a hirio). Kollet o deus alies o micher, atav dre ma oant broadelourien rik. Lod a zo aet en tiez bac'h, ha lod all en harlu. Ha kalz a re yaouank a c'houzanve bremañ kemend-all ? Ya, mégred ! met n'o deus ket an dogouezh, nag an tu. Ha marteze ivez ar re gozh o deus graet ar pezh a c'hellent ober, en o amzer, ha n'eo mui da ober d'ar re yaouank bremañ.

Petra a ra ar re gozh e Pariz ? Diot eo krediñ n'heller ket labourat evit Breizh e Pariz, koulz ha marteze gwelloc'h hag aezetoc'h ret eo lavarout, eget e Breizh. Al labour a vez graet e Pariz, kredit mat, n'hell ket bezañ kaset da benn e Breizh. D'an holl eo derc'hel al liamm etre Breizh ha Pariz. Evit gwir plaes ar wir Vreizhez a zo e Breizh. Met ne c'houlenner ket atav penaos ha perak int deuet da Pariz. Alies eo en despet desho, an holl her goar.

Ar re gozh a zo sonn war o zachoù elloc'h m'emaint. Kalz diuto a ra c'hoazh labour vat. Gwelout a reomp avat ur mor a zud yaouank o sevel. Dont a reont, ha setu. Koulskoude, abaoe ar brezel hon eus ranket gortoz 1947 evit gwelout pennoù soublet o sevel (pa oa devet kembreiz da ober o zro). Koulskoude eo bet ranket gortoz 1956 evit gwelout ur skol vugale brezhonek-gallek o vezañ krouet e Breizh. Gwelet hon eus avat saveteiñ ar biniou hag an dañs, hon dilhadoù broadel douget adarre gant lorc'h, Kelc' hioù kevrennoù o vleuniañ e pep lec'h. Donoc'h-don e toull an alar an erv. Gwell a se ! Gant an tammig reuz a zo bet e-pad an hañv da geñver ar



## UR SELL WAR DREGER VIHAN

Gant Alain TORAVEL

Ar studiadennig mañ diwar benn Treger Vihan am eus tennet diouzh un enklask graet e 1958 gant ur strollad ekonomouriezh sell da ziazezañ linennoù bras ur vro nebeut studiet betek hen.

Trawalc'h a vo din bezañ diskouezhet deoc'h ar sifroù am eus dastumet e pep tachenn eus ar vuhez gevre digezhel. Gelllet em bije evel just reiñ kalz muioc'h anezhe. N'emañ ket aze va fal. C'hoant am eus bet da gentañ holl tresañ dremm ur vro glanv, ha n'eo ket gant statistikou a c'heller emwelout kleñved ur vro, ha dreist holl kleñved spered ur vro. Re a bouez a vez roet bre-mañ d'ar fedoù ekonomikel hag e teuer da zisofjal ez eus tud o vevañ, o c'houzañv a-drek ar sifroù. An arc'hant na ra ket an eurusted, a vez lavaret alies. Muioc'h mui ez on douget da soñjal e c'hell bezañ implijet ar c'hrennlavar mañ, en ur bed ma welomp ennañ broadelezhioù, o sevel gwitibunan, daoust d'an holl ziaesterioù strewet war hent an emrenerezh. Seurt emsavioù a c'hell hañvalout enepreizhel, p'emañ diazezet galloud daou ramz, ar stadoù unanet hag ar socioù, war broioù diver ha liesdoare. Morse n'eo ket bet ken viverus avat niver au emsavioù broadel hag er c'hantved mañ, n'hellomp ket dianzav ar fed mañ.

Evit dont endro da Dreger Vihan, n'heller ket eta livañ stad reuzeudik ar vro gant sifroù hepken, nemet marteze an divroañ. Kouskoude ez eo anat d'an neb a gej un tammig gant an dud se o dic'hoanag dirak an amzer da zont. Evito ez eo kondaonet o flanedenn, pa ne weler ket penaos implijout an holl re yaouank +ho/ o sevel stank er bloavezhioù mañ. Met kement se n'hell ket bezan merzet diwar an diavaez. A wechoù e vez goloet stak gwirion an traoù gant ul liv a binvidigezh. N'eo ket ret toullañ don avat evit diskavout ar vein hag an drein. Da ziwall e vo neuze, evel m'eo bet meneget dija, na vo digoret o daoulagad d'an dud se. Ur bobl war vord an dic'hoanag a verzo neuze n'ho devo netra da goll en dispac'h.

1/ Ar Vro

N'eus nemet ul lodenn eus Bro Dreger a yelo da sevel danvez ar studiadenn. An tri c'hanton studiet en he barzh a zo kanton landreger, lezardrev hag ar Roc'h, bodet dindan anv stroll an Dreger Vihan. Ar c'hornbro a zo dezhañ 28 km ledander war 12 km hirder.

Ur vro gomez eo dre vras, treuzet gant traoniennoù don kenañ, evel hini ar jaodi pe an Drev, hag a zisparti ar vro e kombodoù bloz.

Na vez troet ar vro nemeur war zu ar mor. N'eus nemet ur vandenn strizh a-hed ar mor gouestlet tamm pe damm d'al labour mor.

2/ An Dud

30.000 a dud a vev e Treger Vihan disrannet e 29 kumun. En 11 anezho, ez eus nebeutoc'h eget 500 annezad. Ker vrasañ, landreger, a gout 3450 den. Laosk neurbet e vez an annezañ. Div drederenn eus an tiez a zo savet distag an eil diouzh egile.

An divroañ eveljust eñ deus graet gaooc 1.850 e reuz e

e touez ar boblañs. Aet kuit eo 15.050 a dud abaoe ar c'houlz se. Ur gumun evel koadaskorn he deus kollet 60 % eus he zud. An darnvuiañ anezho o deus divroet da Bariz, d'an Harv Nevez, pe aet da labourat er verdeadurezh. Ha kement se daoust da niver ar ganedigezhioù bezañ kalz uheloc'h eget hini ar mortuaj.

Un emvroat iskitz a-walc'h He deus anavezet ar Vro ! hini leoniz. Dre zasprenañ mereurioù dilezet, dre labourat start war al legumajoù prim, ez int deut a-benn abaoe derou an ugentvet kantved da vestroniañ al lodenn binvidikañ eus ekonomiezh ar vro. Gwelet fall e vezont gant tud ar vro dre vras, a ra diouer dezho ampartiz war c'henwerzh.

Heñvedra eo c'hoawezet gant an desevel istr a ra berzh war an aod. Diazezet eo bet gant estrañjourien d'ar vro, Morbihaniz.

### 3/ Al labour douar

Bez'ez implij Al labour douar 7.700 den. Oberiantiz pennañ ar vro eo eveljust. Ouzhpenn kudenn al labour douar eñ-unan er bed bremañ, e kaejer amañ gant kudenn un douar dilezet gant ur rak-tres labour spis a lakje urzh e-barzh strivoù liesdoare an hiniennoù.

Pep mereupi a zo deshi etre 10 ha 20 kantarad liesdoare e vez ar gounid douar, a zo chom stag ouzh hengounioù an amzer dremenet. War an aod avat e vez graet legumajoù prim, ha dreist holl an avaloù douar. N'heller ket komz eus "gouriz Alaouret" evel kornbro kastell Pol. Pep tiegezh a labour e barkig avalou douar, met lod vrasañ ar gounid arc'hant a ya etre daouarn hanterourien a gas an avalou betek Bro Bariz. 80 % eus an douaroù labourer o deus un ober uhel. An ed a c'holo 20 % eus an douaroù se. An ober hed a dizh etre 30 ha 40 kantlivr dre gantarad, ha zoken 55 kantlivr e kornioù 'zo.

Diabarzh ar vor a zo paouroc'h, Dilezet eo bremañ dre holl labour al lin, hag a reas pinvidigezh wechall Bro Dreger. Astennet e vez ar veikanikouriezh, hag en darnvuiañ eus ar mereurioù e kaver ur stlejer.

Kelennañ ar gounid douar na oa ket meneg anezhañ betek heñ, pephini o labourat hervez e skiant-prenet (siwazh, dreist holl evit ar pezh a sell ouzh an temzoù douar, Ma vez degemeret dre holl gant ar gouerien an temzañ, e vez graet fazioù niverus gant e implij), shivoù a vez graet bremañ evit reiñ un deskadurezh vihan d'ar re yaouank diwar benn o labour.

### 4/ An Arvor

Anat eo an digempouez etre tud ar gounid douar ha re ar mor. 1050 den a vev diwar goust ar mor. E gwir, n'eus koulz lavaret hepken a beskeba, nemet e porzhig Rerwenan. Lod kaer eus an yaouankizoù a ya er verdeadurezh, ha dreist holl war vourzh coulieren. Un toulladig tud a vez implijet gant an desevel istr (Degaset e vez an had istr diouzh ar Mor Bihan, rak re yen eo dour Mor Breizh evit hen ober).

Ur monedone dister a vuhezeka un tammig kaer landreger. Dilestret e vez koad; simant ha gwin, hag ermaeziet avalou douar hag ed.

### 5/ An ijinouriezh

N'eus ket a ijinouriezh, nemet labouradeg an Arvor, a labour war ar vezhin dastumet war an aod e-pad ar goañ. Na gaver

a-hend all nemet embregerezhioù prevez, a denn d'an dourvi-cherouriezh, hag oc'h implijout 1.700 den.

Na vefe ket diâs koulskoude ijinañ ul labouradeg evit treuzfurmiañ gounidoù an douar. Mes pelec'h kavout an arc'hant, ha dreist holl an harsidegezh !

#### 6/ Ar c'henwerzh.

Moredet a-walc'h e vez ar c'henwerzh a-hed bloaz, nemet e-pad an hañv e kerioù landreger ha lezardrev. Feurmet e vez kalz a diêz gant tud ar vro evit an éhanoù bras. N'eus marc'had bras ebet er c'hornbro. Foar landreger a zo deut e-barzh an Istor Kozh. Da notañ ez eus ur c'hafedi evit 200 annezad. War an aod dreist holl, eo souezhus ha glac'harus war un dro gwelout niver an dud, hag en o zouez kreunarded ugent vloaz, krignet gant ar vezventi.

#### 7/ Ar Skol.

Bez e kontez 12.200 bugel betek 19 vloaz leun e vez ar skolioù dre holl en derez kentañ. E landreger e kaver liseoù ha skolajoù. Met dedennet e vez kentoc'h skolidi an eil derez gant diazezadurioù Lannuon ha Gwengamp. Div skol tiegezh hag ur skol evit moused ar verdeadurezh a gaver ivez.

#### 8/ Ar Mennozioù

Bevañ a ra c'hoazh ar vro war anvour darvoudoù disann 1.905 etre ar Stad hag an Iliz, hag a reas d'an ampoent se ur gwir zispac'hig e Landreger etre ar "re wenn" hag ar radikaled. Dre vras eo chomet kreisteiz ar vro stag ouzh mennozioù mi-pout an tu deho, tra m'emañ an Hanternoz a du gant ar gouarnamant hag an tu kleiz.

Kemeret o deus bremañ ar gomunisted lec'h ar radikaled a ya da get o levezon. En o c'hichen e kaver ar sosialisted. En tu all, e vez rannet ar mozhioù etre ar MRP hag an UDSR. Diseblant e chom ar re yaouank dirak ar bolitikerezh. N'eo nemet paz int aet da labourat d'an diavaez, e teuont en dro evit ar retred gant mennozioù ruz.

Evel ma weler, n'eus linenn vras ebet en ur seurt bro. Bevañ bevaik a rankfed lavarout kentoc'h pa gomzer eus ur seurt buhez - goustad goustad ez a war ziskar an holl aperiou e-kreiz diseblanted an holl. An nerzhioù nevez a c'hellfed engortoz un dra bennak diganto, ar re yaouank 20 vloaz, a dec'h kuit diouzh ar vro kerkent hag echu ar skol. Penn-durezhioù ar c'humunoù na seblant ket meizañ stad truezus o bro. Kollet e kreiz aferioù munud ha dister buhez ur geriadenn, n'int ket gouest da welout ar gudenn en ho fezh. Ur gwir dremenvan emeur o vevañ.

Marteze e vo kavet a-benn nemeur un diskoulm da gement se: pa vo aet an holl boblañs da get, e vo kaset amañ kabiled da adc'hounit an douar, neketa ?

Alan TORAVEL.



DE LEVRE

## PER DENEZ

° Ar brud a zo bremañ en emsav gant an arboellerezh. Arabat krediñ, a-hend-all, emeur o paouez dizoleiñ anezhañ : oc'h adlenn bremañ dastumadenn Breiz Atao e welan nag ur pouez a oa roet d'an arboellerezh en amzer-se. er c'hontrol eus ar pezh a greder peurvuiañ. Kentañ skrid hir Debauvais, embannet e stumm ul levrig, a zo diazezet war an arboellerezh : "L'intérêt breton et l'avenir de la Bretagne". An is-titl, avat, a zo ken a-bouez all : "essai d'un nationalisme breton positif". Da lavarout eo ne oa ket arboellerezh hepken, met arboellerezh e servij ur menoz, kentoc'h arboellerezh o kas d'ur menoz : d'ur gudenn arboellerezh ne c'helle bezañ nemet un diskoulm politikel. Ar pezh a zo da zi sfiziout diutañ eo an "arboellerezh hepken". Arouezius eo kacout war ar poent-se menoz unan eus renerien ar strollad hag en deus graet kement a implij eus arguzonnoù o tennañ d'ar vuhez materiel, ar strollad komunist a fell din lavarout. Setu ar pezh a lavare Jacques Duclos, e miz Gouhere, e-pad kendalc'h Ivry, d'ar c'hazetennour Jean Cau aet da gomz gantañ : " Eviter de sombrer dans l'économisme qui limite tous les problèmes et, d'autre part, éviter de n'être que des prêcheurs. Toujours, et toujours en se mettant au niveau des travailleurs, il faut lutter et par delà les misères, mettre à vif la cause du mal "; (Express, 2 a viz Gouhere). Arabat mont da ouelediñ en arboellerezh, hag a strisha an holl gudennoù ... "Un ali mat. Hag un all, a zo arabat deomp-ni disoñjal ivez : " en em ziwall diouzh bezañ sarmonerien hepken ... " Kement e kar ar Vretoned sarmonal.

° Prometet em boa skrivañ evit LABOUR un " deizlevr ". Da lavarout eo, evel m'hen diskouez an ano, ur seurt levr skrivet a zeiz da zeiz. Met n'eus tra diascoc'h eget kavout, bemdez, un nebeut munutennoù sioul da skrivañ ! Sammet e vezer gant ar vuhez, gant trevelloù bihan hapouezus a bep seurt, ken ez eo ur spont. Re nebeut ez omp marteze. Krediñ a ran ez eo an hevelep tra en holl vroadoù bihan dimesaet gant kantvedoù a sujedigezh, e-lec'h ma'z eus un dornadig tud o terc'hel bev ar flamm -- ar flamm a bogo diout an tandad bras un deiz. Lonket e vezer gant ezhommoù pomdeziek ar stourm, neuze, kenavo d'al lennegezh ha kenavo d'ar preder ! Bugale a zo da vegañ, kolaouonnoù da lakaat da vevañ, ha n'eus nemet 24 eurvozh en un devezh, a ranker tremen un drederenn anezho, pe dost, o kousket ! Ma, krediñ a ran o deus bet an holl stourmerien all araozomp en hevelep trubuilhoù. Ni, avat, hon eus bet ur vosenn souezhus da c'houzañv : hini ar falc'huneg. Pa vo gouezet nag a zistruj he deus graet ar vosenn-se e Breizh, rak un deiz e vo ret mat sellout war hon tro ha displegañ, e chomo sebezot meur a hini.

° Daoust hag e c'hellan kentañ un istor fontus ? Ken nebeut a zigarezioù hon eus da c'hoarzin ! " Sirius-gavr " ez omp holl, evel ma skrive gwechall Meavenn. Ma, klevit : e Kornog Bro-Skos e vez diaes d'ar servijoù-post kas o lizheroù d'an enezourion. Gouzout a rit : ur bern enezennoù bihan, gant, a-wechoù, pemp pe c'hwec'h familh hepken o chom warno : un armead (bihan) pactred-al-lizheroù eo a vefe ezhomm. Kavout a reer marc'hadmatoc'h, neuze, pacañ an dud evit dont da gorc'hat o lizheroù o-unan war an douar bras, en un nebeut lec'hioù merket. Evel just, evit pozañ paet, e rank an dud degemer lizheroù. Neuze e koumanantent d'ur gelaouen sizhuniek bennak, da vezañ sur da gaout atav un dra bennak evito er post. Ne lavarer ket hag-eñ e kasont lizheroù dezho o-unan pa'z eont da lizheraoua war an douar bras ! Ha bep pemzektez, pe bep miz, diouzh an amzer, ha diouzh meur a dra all, ez eont d'ar burev-post, e kemeront o lizheroù, hag e sinont o ano war ul levr bras da ziskouez int deut d'o c'hemer. An tammig leve a c'houezont evel-se a sikour an ezho brav-tre da vevañ.

Deut eo mare ar c'histin. Barradoù avel o deus taolet anezho en traoñ, ha diriaou on aet gant ar vugale da gistina. Ur blijadur eo bezañ er parkeier dre ar seurt amzer. Soñj e zeu din, o krazañ kistin evit va bugale, eus va zad o krazañ kistin evidomp war fornigell ar sal-debrif. (Sistr hor boa neuze ganto, sistr mat Breizh-Uhel : morse n'on deut da garout sistr Fouen, n'eo mat nemet evit an touristed.) Ur remziad koshoc'h on deut da vezañ ! Na buan e tremen ar vuhez.

Dirak ar "c'hinnigoù a beoc'h", daoust hag e ouio otred an FLN chom unanet ? Daoust hag e ouio an FLN hag an MNA diskouez un talbenn unvan ? Emichañs e raio ar C'hallaoued eus o gwellañ evit troc'hañ ar stourmerien e daou vagad enebour, a vo iset an eil a-enep d'egile goude-se. Arabat eo disoñjal ez eo er seurt degouezhioù o deus anavezet Iwerzhoniz unan eus darvoudoù mantrusañ o istor, ken leun koulskoude a zarvoudoù mantrus ar brezel-diabarzh. Gwir eo o deus gouezet Israheliz, en un enkadenn hefivel, diarbenn gwalleur ar stourm etre-vreudeur, daoust d'an tabutoù etre an Haganah hag an Irgoun ha d'an doare divalav-tre ma'z eo bet graet ouzh pao-trek Menachem Beigin ; a-walc'h a nerzh-kalon hag a emzinac'h o deus bet ar re-se, avat, hag o doa graet brezel an dieubidigezh, evit en em ren e doare na vefe ket skuilhet gwad Yuzevien gant Yuzevien all.

Israhel : un nebeut mizioù zo ne oa kaoz nemet eus un emglev start ha strizh etre Israhel ha Bro-C'hall. Ur wir romant a garantez etre an div vro. Ha bremañ : setu labouradegoù Renault o terriñ o marc'hadoù hag o nac'h kas kirri ken da Israhel. (Svediz, hag o deus ur c'harr ken mat, ar Volvo, o deus graet kinnigoù diouzhtu). Respont a raio Israheliz dre lakaat Yuzevien an USA da chom an USA da chom hep prenañ kirri Renault ken. P'emañ ken taer eno ar stourm etre ar Renault hag ar Volkswagen ! Diskenn war gounid ermaeziadegoù Renault ha diskenn war un dro war ermaeziadeg filmoù B.B ! Nag un dicheañs !

Gouzout a reer pegen pouezuz eo nijva ar Shannon, ken evit Iwerzhon, ken evit al linennoù kirri-nij etre Europa hag Amerika. Krog eo Iwerzhoniz da sevel labouradegoù a bep seurt en-dro d'an nijva : marteze e rakwelont an deiz n'o devo ket ezhomm ken ar c'hirri-nij-beajourien da chom a-sav eno ? Forzh penaos, kalzik renerien-labouradeg a zo hag a gav marc'hadmat, ouzhpenn aes ha prim, ermaeziañ dre an aer. Ul labouradeg elektronek (savet gant ur gompagnunezh eus Chikago) hag ul labouradeg pianoioù (savet gant ur gompagnunezh eus Bro-Holland,) a zo bet digoret eno er miz diwezhañ.

Un dra heverk en ijinerezh iwerzhonat eo al lec'h dalc'het ennañ gant implij an taouarc'h. Gwir toullerien-hent eo bet Iwerzhoniz er sigur-se. Labouradeg bras gwispidoù Jacob's a zo o paouez en em lakaat da implijout an taouarc'h. Er bloaz-mañ en deus Bord na Mona, Kevredigezh an Taouarc'h, tennet ouzhpenn daou vilion hanter a donnennoù taouarc'h, o reiñ evel-se labour da seizh mil den. Daoust ha n'eus ket aze ur gentel hag ur skouer evidomp, evit al lakaat-talvezout hon taouarc'hegi eus Bro-Naoned hag eus ar menezioù ?

